


GUEZR

CATHEL-COLLET

An dra-ma zo erruet er guær a ITARA,
en Indes-sav-eol, er bla 1560.

BIBLIOTHÈQUE
DE
RENNES



PED den, sioüas, a so dalc'hêt
Dre al laçou an drouc-speret :
Ped den a guev daonation
Oc'h ober goal goversation !

Cetu un exempl trist meurbet
Zo bet en Indes c'hoarvezet :
Tud coz, tud yaouanq, clèvit-hâ,
Qemerit patron diountâ.

Ur plac'h yaouanq, hanvet Cathel,
Matès e ty un demesel,
Or vit beva diouc'h he roll,
A guittas Doue en oll d'an oll.

N'e doa qet bemzec vloas fournis
Pa gommanças he yaouanqis;
He yaouanqis a roas d'ar bed,
D'ar gloar, d'an danç, d'an drouc-speret,

Bep Sul ha bep Gouel ordinal
Ne c'houlenne nemet bragal :
Goude'n ofern betec an nos,
An danç a voa he Barados.

En ilis hed an ofiç divin
Ne rē nemet prezeg, c'hoarzin,
Ba trei he fenn scān da sellet
A bep tu ouc'h ar galantet.

Biscoas ne glēvas a galon
Nac an ofern, nac ar sarmon :
El lec'h clēvet ar gousperou,
E zē atao d'an ebâtou.

Mont a ra c'hoas d'an nosveziou,
Da scol cruel an diaoulou,
En d'espit d'escop, d'e mestres,
O lamet evel un heizes.

Eno e tiscas mil bec'het,
Ancouec'hât Doue, blijout d'ar bed ;

Eno e tisqas comzou lic,
Sonjou ha desirou lubric.

Scuis voe Doue ouc'h he guelet
Souillet gant qelies a bec'het,
O caout un danjer bras outi,
Ne allas mui e anduri.

Sqeï a eure gant ur c'hlénvet
An danved, pell voe dianqet :
Ma carje côves ha distrei,
C'hoant en devoa pardoni dei.

He mestrez, mat ha damantus,
Ha velas he stat perillus,
A lavaras dezi ! Cathel,
Va merc'h, ho clénved zo cruel.

Considerit gant dilijanç,
Qément zo var ho conscianç ;
Nettait ervat hoc'h ene.
Evit mont hardi dirac Doue.

Qemennet voe ur Religius,
Un den humbl ha trugarezus ;
Ar plac'h a govessas ountâ
Abars mont demeus ar bed-mâ.

En nos goude ma cōvessas
E velas ur sclērijen vras,
Ma qerqent un demesel venn,
A gomzas outi evel-hen.

Clēvit ha clēvit c'hoas, Cathel,
Et ē ho buez, ret eo mervel ;
Me a zo Mari-Madalen,
Avocades ar bec'herien.

Cōvessit c'hoas hep faut ebet
Rac ur pec'het oc'h eus nac'het ;
Tolit an ampoeson cuset.
H'otramant e viot collet,

Clasqet voe en tad adare,
Da gōves ar plac'h a neve ;
Moguen he zéod a voa staguet
Gant ar vez hac an drouc-speret

Goude ze, just d'an anter-nos,
Pa ne alle Cathel repos,
E tistro Mari-Madalen,
Hac a gomz outi evel-hen.

Cathel, petra oc'h eus-hu grêt ?
Eur pec'het vil oc'h eus cuzet ;

Cuzet oc'h eus un ampoeson,
A vo caus d'ho taonation.

Antronos, pa darzas an de,
E retornas an den Doue ;
An den Doue a zigassas
An nouen dezi hac ar groas.

An tad, pa antreas en ty,
A lavaras a grenn dezi :
Mar zeus netra var ho conscianç,
Livirit-e gant repantanç.

Livirit franc, hep nac'h netra,
Deut è an termen diveza ;
Laquit eves, va c'hoar Cathel,
Abars un heur eo ret mervel.

E qeit ma voe eno an tad,
Prest, ma carje, d'he c'hôvessat,
Cetu c'hoas Mari-Madalen
O prezeg outi evel-hen.

Cathel, siouas, c'houi oc'h eus grêt
Eur pec'het vil ha milliguet ;
Côvessait-e gant queus parfet,
Ha me bromet e viot salvet.

En amzer, a gostes cleiz,
E tilamas ul loen direiz
E faç e guis d'un den teval,
E dreid evel d'un aneval.

En e zorn en doa ur c'hlèze,
Pe gant hini he gourdrouze :
Mar còvesses, me as lazo,
Mar tevez, me as crai salo.

O trompherez an drouc-speret !
Ar plac'h a vary en he fec'het !
Qerqent e za dirac Jesus,
Gant he bec'h ponner ha mezus.

An nos goude m'oe anterret,
En ty ma r. ntas he speret.
O tra estranch ! a bed an nos
Ne allas tam nicun repos.

Qement scabel a voa en ty,
Qement tra oll a voa enni,
A voe tollet ha distolet,
Gant un tourni horrubl meurbet.

Pa zavas, antronos beure,
An eil vates er maner-ze,

Ebars er jardin e velas
Ua spec̄ cruel gant eston vrás.

E creiz un tan bras ha grisiez,
E velas hanat ur plac'h qèz,
He bizach leun a zerpantet,
Hac e daoulagad a zourdet.

Petra benac ma stravillas,
Na mui na mes e lavaras :
Me as conjur abers Doue,
Lavar din-me petra out-te.

Heben qen trist a respondas,
O ouelas gant nec'hamant vrás :
Cathel oun, ho camaradez,
Condaonet d'ar flamou griziez.

Cetu va dorn, qiriec d'am c'heuz,
Cetu va zeot, qiriec d'am c'heuz :
Va dorn en deus grêt ar pec'het,
Va zeot en deus-e bet nac'het.

Gant Mari-Madalen oun bet
Daouzeç guech sur avertisset,
D'ober ur güir góvession,
Hac em bije hep faut pardon.

Ur morian du, griz, lostec,
Horrubl, gant e dreit crabaneç,
En eur c'hourdous, terri va fenn,
En deus serret va guinou crenn.

Mallos, d'ar goal gompagnuez,
D'ar sorcerien, da bep nosvez ;
Mallos d'ar bal ha d'an dançou,
Zo bet qiriec d'am pec'hejou.

Na hedit christen evidon,
E creiz an ifern coezet òn ;
Sachet on siouas gant Satan,
Evit va lesqi en e dan,

Clêvit christen, a clêvit pis ;
Bep pec'het còvessit hardis ;
Mar sentis ouc'h an drouc-speret,
Eguis Cathel e viot collet.

F I N